



Penngasour.ez

Kinnig labour embannet d'an / ar lundì 20 octobre 2025

Lec'h : **Gwened**

Doare post **CDI** H/F

Deskrivadur ar post-labour

Emañ Skolaj Lise Diwan Gwened o klask ur penngasour.ez

Post CDI leun amzer bloazieket

An abretañ ar gwelañ

Ur c'hevread kevredigezhel, laik, digoust ha digor d'an holl eo Diwan. Hiziv an deiz ez eo an hentenn gelenn nemeti o kinnig deskiñ brezhoneg dre soubidigezh. Krouet ouzhpenn 47 vloaz zo ez eus e Diwan 48 skol, 7 skolaj ha 2 lise, dasparzhet war 5 departamant Breizh istorel.

Emañ Diwan o klask war-lerc'h ur penngasour.ez evit ar Skolaj Lise Diwan Gwened an abretañ ar gwelañ.

O labourat dindan atebegzh renerezh an ti-skol e vo fiziet ennoc'h :

Aozañ ha sterniañ buhez-skol an ti-skol

Buheziñ ar skolaj-lise (beilhadegoù, stalioù dizarbenn, bodadoù liammet gant ar skolajidi ha liseidi, surentez, yec'hed...)

Merañ ar skipailh kasouriezh (sevel an implijoù amzer, merañ amzer labour ar skipailh, kas an titouroù a sell ar goprou...)

Daremprediñ gant ar gerent diouzh an ezhommoù

Kenlabourat gant ar skipailh renerezh, kelenn, melestradurezh

Titouroù all :

CDI leun amzer bloazieket

Lec'h labour : Gwened

Gwarez yec'hed hag ur prevoyañs

Gopr : 1821.42 kriz/viz + un arc'hopr miziek kriz a sav da 177€

Ma 'z oc'h dedennet gant ar post, trugarez da gas ho emstrivadur (CV+lizher en em ginnig) da tuta@diwan.bzh a-raok an 31 a viz Here. Dalc'het e vo ar bodad tuta d'ar 6 a viz Du e Skolaj-Lise Gwened.

Skiant-prenet ha barregzhioù goulennet

Doare den :

Live C1 e brezhoneg degemeret mat. Brezhoneg komzet hag skrivet mat a-walc'h evit bevañ e brezhoneg pe/hag evit sikour ar skolajidi-liseidi,

Live Bak + 2

Bezañ en e aes evit daremprediñ gant ar grennarded

Bezañ en e aes evit merañ ur skipailh

Plijet gant al labour a-stroll

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://www.diwan.bzh/br/offres-emplois/animateur-trice-principal-e-201020251554>